

# MA HUNVRE

En eun draouiennik morgousket,  
Dimeurs em oa huvreet  
E welen Breiz-Izel gwasket  
Tre daouarn ar C'hallaoued.

Ha Breiz-Izel a lavare :  
« O ma bugel ! O Breizad !  
Me gred ec'h e deut ar mare  
Da rei skoazel d'az mam vad ! »

Mez ar Breizad labaskennek  
A c'hoapae e vam gez,  
Breiz a respontaz : « Dilambrek,  
D'in ar maro, d'id ar vez ! »

Ma daoulagad a zigoraz,  
Ha ma mouez en eur grenan,  
Da Vreiz-Izel a lavaraz :  
« Eur bugel a teuz aman ! »

« Mar 'teuz bugale dilambrek,  
Breiz-Izel, o ma mam vad,  
'Teuz ive pôtrek kalonek,  
Hag az tifenno dalc'hammad. »

« Kousk en peuc'h, mam, evel gwechall,  
Rak ar Breizad hirie  
A lavar « Me a vo feal  
D'am Mam-Vro ha da Zoue ! »

« Ha mar deu ar Gallaou gwasker  
Da bouezan war Vreiz-Izel,  
Ni gemero hon fen-bizier,  
Ha war rôg betek mervel ! »

BARZ ZANT-BRIAK.